

Kimiad eur Zoudard iaouank

War don : *Al labourer.*

1

Ma c'haloun a zo fraillet dre nerz ma enkrezoù,
Ma daoulagad entanet n'ho deuz mui a zaelou
Deud eo ziuaz ! an devez ma renkan dilezel
Lec'h kaer ma bugaleach, ma bro gaer Breiz-Izell !

2

Keno d'id, ma zi bihan, kuzet barz an draonien,
Tachen c'hlaç var behini, bugel, e c'hoarienn ;
Gwez ivin ker bodennek, en disheol a bere,
E pad tomder an hanvou, a gouskenn da greiz-de.

3

Keno ! keno ! mamm ha tad, breman n'esperit mui
E chomfe ho mab kared da harpa ho kosni,
Evid gounid d'hoc'h bara, vel m'hoc'h euz great d'ezhan,
Al Lezen zo didruez, ho kuitaat a renkan.

4

Nag a wech, ma mamm dener, e renkfet-hu lenva,
Pa zeul ma c'hi ankenied e dro d'oc'h da ruza ;
Pa welfot, war an oalet, ma skabellit c'houllo
Hag ar c'hefnid o steul war ma fenn-baz dero ?

5

Keno ! bered ar barrez, douarou binniget,
Pere a guz ma c'herent gand ar Zalver galvet ;
Da ouel an Anaoun klemmuz, n'in mui war ho peziou
Da skuilla dour binniget mesked gant ma daelou.

— 11 —

6

Keno ! ma muia karet, ma dousik koant Mari,
Eur blaneden diegar a zeu d'hon glac'hari ;
Euruzdet ha levenez skeduz zo tremenet
Vel en oabl ar goumoulen gand an avel kaset.

7

Na welin mui da lagad ker lemm ha ker laouen
O virvi gant plijadur, en ti pa erruen,
Da zournik gwenn ker mibin o trei ar c'har en dro,
Da vouez flour mui na glevin o kana va gwerzo.

8

Pa oamp er c'hatekismou, hou daou c'hoaz bugale,
Hor c'halounou diskiant, e kuz a n'em gleve,
Dirag Gwerc'hez ar c'hroaz-hend, nag a wech e touejomp
Na erruje birviken disparti etrezomp.

9

Iaouank ha dibreder, siouaz ! ne vouiemp ket
Nag a bet c'houerventez er vuez zo hadet ;
Evid-omp ne oa, neuze, Lezennou na Roue,
N'anveemp med eul lezen, hini ar garante.

10

Keno, ma nez-amezek, Iannik ma gwir vignoun,
Kamarad ma c'hoariou, ma breur dre ar galoun,
Piou a gemero breman lod ebarz ma foanio ?
Piou a gomzo ganin-me deuz ar gear hag ar vro ?

11

Hep-z-oun te ielo breman d'ar parrezioù tosta,
Da bigosad al leuriou barz el lazou-dorna ;
Hep-z-oun te iel da c'hounid maoud ar c'hourennadedk,
Da chasa war rubanou ebarz er varadedk.

— 12 —

12

Keno, ma c'hazek velen, skanv evel eun heiez,
Mistr evel eul logoden, jentil vel eun oanez ;
N'ez santin ken, dindan-oun, gant an hast, o tripal,
Ma daouarn mui ne stagind ar zaeien war da dal.

13

eno ! ma c'hi kaez, Mindu, ma leal kamarad,
N'efomp ken, dre ar c'hlizen, da glask roudou ar c'had ;
Ne glevin ken, er menez, da chilpaden skiltruz,
War ma dourn mui ne zantin da deod karantezuz.

14

Abenn eun nebeud amzer, kalz a vignounded ien,
Barz er zoudard divroet, hep mar, ne sonjfont ken,
Mes da galoun-te, Mindu, n'eo ket ken ankoezuz ;
Pell e ri c'hoaz va c'hanvou, gand da iezou klemmuz.

15

Keno 'ta plijaduriou, leuriou-nevez, prejou,
Nezadegou, nozvezou, foariou ha pardonioù,
Ebatou ker birvidik. biniou zard ha sklentin,
Na drido mui ma c'haloun gand da zoniou lirzin.

16

Keno kemend a garan, keno da virviken !
Pell ouc'h a Vreiz me varva, trec'het gant an anken,
Vel eur blanten gizidik, evid ar vro krouet,
A renk goenvi ha mervel, kerkent m'eo divroet.